

CHANTIERS DE VOIRIE : UNE PAUSE AVANT LA RENTRÉE

La réalisation du futur Pôle d'Échanges Multimodal (PEM) progresse avec une première livraison majeure et des travaux de voirie qui se réorganisent.

La livraison d'abord ! Le parking longue durée Effia, situé le long de l'avenue de la Libération, ouvre début août. Les Quimpérois et visiteurs pourront pleinement profiter de ces 166 nouvelles places de stationnement.


Les aménagements de voirie ont, eux aussi, bien avancé. Fin juillet, les aménagements piétons programmés pour l'été dans le premier tronçon de l'avenue de la Gare et le long de l'avenue de la Libération auront été réalisés. Les chantiers vont faire une pause en août. L'avenue de la Libération est remise à double sens de circulation et l'avenue de la Gare est rouverte. L'accès au bâtiment voyageurs depuis le centre-ville redevient ainsi plus direct.

La circulation dans le quartier évoluera une nouvelle fois à partir de fin août pour permettre la reprise des chantiers (voir plan ci-dessous). Du 29 août au 15 septembre, d'ultimes travaux d'aménagement seront effectués avenue de la Libération, côté habitations. Durant cette période, la circulation sera remise à sens unique vers le centre-ville. La seconde phase des travaux de l'avenue de la Gare, comprise entre la rue du Docteur Guillard et la rue de Concarneau, se déroulera du 12 septembre à mi-décembre. Pendant ce

chantier, l'accès à la rue du Docteur Guillard sera condamné du côté de la gare. La rue et le parking Bourla resteront accessibles depuis la rue Le Déan. Courant septembre, le chantier de réaménagement du bâtiment voyageurs devrait commencer à s'installer sur une partie du parvis de la gare.



Réaménagement du premier secteur de l'avenue de la Gare : nouvelles bordures de trottoir et piste cyclable



PLUS D'INFOS SUR LA PAGE FACEBOOK GARE PARC ET SUR LE SITE QUIMPER-BRETAGNE-OCCIDENTALE.BZH !
 POUR TOUTE QUESTION : GAREPARC@QUIMPER.BZH

CHANTERIOÛ WAR AN HENT : UN EHAN A-RAOK AN DISTRO

Emañ al labourioù da sevel ar Pol Eskemmoù Liesvod (PEM) da zont o vont war-raok gant un degasadenn gentañ a bouez ha gant labourioù war an hentoù emeur oc'h adrenkañ.

An degasadenn da gentañ ! Ar parklec'h hir amzer Effia, a zo a-hed bali an Dieubidigezh, a vo digoret e deroù miz Eost. Gallout a raio tud Kemper hag ar weladennerien ober o mad eus ar 166 plas parkañ nevez-se.


Al labourioù da adterkañ an hentoù, int ivez, zo aet kalz war-raok. E dibenn miz Gouere e vo kaset da benn an terkadurioù programmet a-benn an hañv er pennad kentañ eus bali ar Gar hag a-hed bali an Dieubidigezh. Ehanet e vo al labourioù e miz Eost. Digoret e vo bali an Dieubidigezh en daou du hag addigoret e vo bali ar Gar. Evel-se e vo eeunoc'h adarre mont d'ar savadur beajourien eus Kreiz-kêr.

An tremenezh er c'harter a emdroio ur wech ouzhpenn adalek dibenn miz Eost evit ma c'hallor adkregiñ gant ar chanterioù (gwelet an tres amañ dindan). Eus an 29 a viz Eost betek ar 15 a viz Gwengolo e vo graet labourioù terkañ diwezhañ e straed an Dieubidigezh, e tu an tiez. E-pad ar prantad-se e vo digoret an hent war-zu kreiz-kêr en un tu hepken. An eil prantad labourioù e bali ar Gar, etre straed an Doktor Guillard hag ar straed Konk-Kerne a vo kaset da benn eus an 12 a viz Gwengolo betek kreiz miz Kerzu. E-pad

ar chanter-se e vo serret straed an Doktor Guillard e tu ar gar. Gallout a raio an dud mont er straed hag er parklec'h Bourla adalek straed an Dean. E-kerzh miz Gwengolo e tlefe ar chanter da adkempenn ar savadur beajourien kregiñ d'en em staliañ en ul lodenn eus leurgêr ar gar.



Labourioù da adterkañ ar pennad kentañ eus bali ar Gar : bevennoù nevez ar riblennoù-straed ha roudenn divrodegoù



**EVIT GOUZOUT HIROC'H : PAJENN FACEBOOK AR GAR LIORZH HAG AL LEC'HIENN QUIMPER-BRETAGNE-OC-CIDENTALE.BZH !
EVIT FORZH PESEURT GOULENN : GAREPARC@QUIMPER.BZH**